

An Arzhanaou, d'ar 15/10/2018



PRIZ AR YAOUANKIZ 2019

Da gelennerien brezhoneg skolajoù ha liseoù Breizh

Demat,

Evit ar bloavezh 2018/2019 e vo c'hwec'h levr, kinniget d'an holl rummadoù divyezhek (Diwan, Dihun, ha Divyezha) e Breizh ha votet e vo gant an holl e miz Mae :

Evit ar re 6vet / 5vet

Tri romant disheñvel-tre, gant doare tri skrivagner boaz da skrivañ evit Priz ar Yaouankiz. Istor Goulc'han Kervella etre mojenn ha gwirionez istorel, istor Yann-fañch Jacq war bevennoù ar romant a-vremañ gant un dra a zo o tougen galoudoù hud, ha Armel Le Sec'h, lec'hiet e amzer ar Gelted kozh, eus bep tu Mor Vreizh.



Evit ar re 4e / 3de/ lise

Tri romant hir a-walc'h, ur romant istorel a gont penaos e oa 'pad ar brezel yen e Rusia, ur veaj digredus etre ar gozh Europa ha Stadoù Unanet, un doare thriller « Loubianka », skrivet gant Jakez -Erwan Mouton. Romant Yann-fañch Jacq a gont en un doare eskemm lizhiri buhez ur skrivagnerez yaouank o tizoleiñ bed ar repuidi e Paris. Hag hini Laurence Lavrand a lak ar grennarded da vevañ « Devezhioù glac'harus » a-vremañ.

Koust a ra 12 euro an dastumad tri levr, profet e vo un dastumad da bep kelenner a gemero perzh. Ur wech graet ho soñj, leugnit ha kasit ar follen-respont da heul asambles gant ar chekenn da G/Keit vimp bev - 22 Grand Rue - 29 520 Laz.

Gallout a rit selaou en linenn pennad kentañ pep levr, lennet gant Sten Charbonneau ha lennerien all war al lec'hienn kvb pe ar bajenn you tube tvbrokemperle

Tu zo deoc'h dont da gemer al levrioù e Karaez evit Gouel al levrioù (27/10 - 28/10). Kasit ur postel da Geit Vimp Bev evit kelaouiñ anezho.

Joa ha distro-skol laouen deoc'h

fanny Chauffin, prezidantez fea

